

531

96


# D'AN AUTROU FLO ,

EUS A LESNEVEN ,

## Chef Bataillon ar Zouavet ,

DA BEHINI LESNEVENNIS O DEUS ROET EUR BANQET

AN 22 EUS A VIS QERZU 1841.



Var ton : *J'ons un Curé patriote.*



Autrou Flo , plijet ganeoc'h  
 Ma teuin , en güir Vreton ,  
 Gaat levenes da offr deoc'h  
 Va hommach a greiz calon.  
 Trida' ra ar goad em c'hreiz  
 Pa veulàn haroset Breiz :

Autrou Flo , autrou Flo ,  
 C'houi a ra enor d'hor bro ,  
 Enor d'hor bro , enor d'hor brò !



Er penn demeure ho rejimant  
 C'houi a voe e peb amzer  
 Hanavezet Breton vaillant  
 Er gombatjou en Alger.  
 Bez' oc'h eus d'Abdel-Kader  
 Meur a vech lardet e lèr....

Autrou Flo, autrou Flo,  
 C'houi a ra enor d'hor bro,  
 Enor d'hor bro, enor d'hor bro !



Cuntinuit hivisiqen  
 Da zisqueuz d'ar forbanet  
 E zoc'h buguel a Lesneven,  
 Ha dre se en Breiz ganet.  
 A viscoas Breiz-Izellis  
 A voe leun a vaillantis.

Autrou Flo, autrou Flo,  
 C'houi a ra enor d'hor bro,  
 Enor d'hor bro, enor d'hor bro !



Gant joa vras eo e velomp-ni

Ar stereden a enor  
 Var ho peultrin o luguerni,  
 Pini gant gloar ho tecor.  
 C'houi vo scoüer e peb amzer  
 D'an Armoricanet qer.

Autrou Flo, autrou Flo,  
 C'houi a ra enor d'hor bro,  
 Enor d'hor bro, enor d'hor bro !



Enor ha gloar ive ra vo  
 Er memes amzer rentet  
 Da zoudarded vaillant hor bro  
 Zo' veldoc'h n'em distinguet :  
 Autrone Eugèn Penqer,  
 Champeaux ha Lamoricier,  
 Potret reiz, potret reiz,  
 Eveldoc'h bugale Breiz,  
 Bugale Breiz, bugale Breiz !



Gloar anfin d'an oll Vretonet  
 Zo ebars en Algeri,  
 Ha graç deo da rêi da zonet

D'ar Bedouinet var o fri.

Laquit, potret c'hoeck a Vreiz,

An tanfinfoëltr en o c'hreiz...

Gloar bepret, gloar bepret

Ravezo d'ar Vretonet,

D'ar Vretonet, d'ar Vretonet !



O gæric coant'a Lesneven !

Ho pet memor en peb deiz

Eus a vignonet ancien,

Conscriet ar bloavez seiz :

Condamin, Ar Fevr, Poilpre,

Vaumouss, voe ho pugale.

Potret woesck ha qeuziet,

Ni'r bo sonch ouzoc'h bepret,

Bepret, bepret, bepret, bepret.

